

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù - Dañs round

**Ur paotrig bihan a Blouguerne**

Un paotrig bihan a Blouguerne,  
A oa aet en ur vale.

A oa aet da Lezneven,  
Da glask louzoù diouzh ur boan benn.

E Lezneven p'oa erruet,  
Na goulenn lojañ en doa graet.

Amañ vez lojet den ebet,  
Nemet er gwele ar plac'hed.

Ar c'hompliment 'n doa kavet mad,  
E zafen tri 'n er gwelead.

Un tremeniad o tont en ti,  
En aviz blagiñ ha fumiñ.

N'a pa z'eus amañ c'hwec'h botez,  
'Tle bezañ ivez teir maouez.

Elumit ar goulou ma welin,  
He neuze sur e kompreniñ.

Pa oa elumet ar gouloù,  
Oa kavet Saik etrezo div.

Me zo bet tomm din en noz-mañ,  
Etre an div femelenn-mañ

Etre an div femelenn,  
Hag etre div liñsel wenn.

Echuiñ a ra va c'hanaouenn,  
Rak ar merc'hed zo leun a c'hwenn.

Ar c'hwenn, ar merc'hed a zo gwak,  
Pa spegont mat e chomont stag.